

Jaffrennou : C'hoari fentuz : Ar bourhiz lorhuz.

Bet embannet e 1899.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Meur a vi-koukoug a zo er skrid-orin.

Iskiz a-walh eo an istor.

**C'hoari fentuz
Ar bourhiz lorhuz.**

en tri arvest

pe Istor plijaduruz eun Aotrou divrezoneg

deut da veza eur Breizad mad

Kinniget da

Jozeb LOTH ha Frañsez VALLEE, Breiz-Izel

Ian HAYE, Breiz-Veur

Edmond FOURNIER D'ALBE, Iwerzon

Difennerien galoneg gouenn-dud ar Vretoned

Keid 'vo kerreg en aod ar mor,

Bepred en yez koz an Arvor

'Gano ar Barz war dreuz e zor.

AN UHEL.

C'hoarieren

An Aotrou TEO, bourhiz.

E WREG, itron stummet.

ANNA, o merh.

YANN MILLER, peizant yaouank, servijer Anna.

ANASTASE MERCIER, strak aotrou, c'hoantuz Anna¹.

PER COCAGNE, micherour.

KATELL, matez ar vourhizez.

MICHEROURIEN, PEIZANTED, ARCHERIEN.

Eur PLAH OSTALERI.

An aotrou MÊR.

¹ c'hoantuz Anna : amourouz Anna.

Kenta arvest

An aotrou Teo, eur bourhiz pinvidig, a zo e-unan war an teatr. Bale a ra gand eun êr uhel, e gov astennet en a-raog. Komz a ra.

Kevrenn I

Roi va merh da hennez ! Eur peizant ken izel
'N-eus ket eur gwenneg toull 'n e di na 'n e hodell,
D'eun den na oar lared na "bonjour" na " bonsoir",
N'anvez ket ar galleg, 'med brezoneg ne oar !²
E dad 'zo eur merour demeuz ar reñk dister,
E vamm 'zo bet matez ! N'en-deus na stumm nag ear³.
Va merh 'ra 'med gouela, 'ra 'med soñjal dezañ...
War va feiz n'he lezin biken da vond gantañ !,
Beza din daou vil skoed a leve. - ha dihle⁴, -
Ahanta du-mañ-du-hont, hg a-hend-all, danve'...
(*Chom a ra da zoñja*).
Me, 'vid gwir, n'ouzon ket ar galleg difazi,
Mez va merhig Anna a zo bet er skol, hi !
Pe 'de' c'hoant e tispieg peziou galleg dinamm..
... En ze, red din anzaou, eo heñvel deuz he mamm !

Va gwreg, daonet 'vin ket, honnez he-deus eur beg !
Ma ve deg 'eneb dezi, e hounezfe war deg !...
Mez... deom d'ar wirionez. Petra 'lavarfe 'n dud
O weled an Aotrou Teo o vond da goll e vrud
'N eur roi e bennherez d'eur peizant er hiz-se ?
Nann ! Gouel pez a gari !... Ne ran forz evid-se.
Gand hennez ne di ket.
(*Gand eur vouez dudiuz*).

Me 'anvez unan all
Eun aotrou euz a gêr, a zo uhel e stal,
Hag a vije mad dit...

(*Amañ e tigor an nor hag Anna, merh an Aotrou Teo, a zeu e-barz*).

Kevrenn II

Ar bourhiz, Anna

Ar bourhiz

² N'anvez ket ar galleg, 'med brezoneg ne oar !

: n'anavez ket ar galleg, ne oar nemed ar brezoneg.

³ ear : êr (stumm Leon evid ar rim).

⁴ dihle : "dle" distaget "gle" e meur a leh. "dizle", heb dleoud arhant da nikun.

Hirio out mintin-mad.
Deus, va merhig Anna, da rei eur pok d'az tad.

Anna

Demad, va zad karet.
(Poka 'reont an eil d'egile).

Ar bourhiz

Da zaoulagad 'zo ru',
Anna vihan. Perag ema da dal ken du ?

Anna

N'ez eus netra, va zad. Ne deo ket du va zal,
Ha ma kerit, ouzoh me a hoarzo raktal.

Ar bourhiz

C'hoarz red ne dalv netra. Me 'bari e soñjez
En Yann Miller adarre ! Red e vezez diodez !
Te 'oar se da-unan. Ar penn brezoneg⁵-se
Ne lenn 'med journaliou euz on zammig kontre.
Ne heuill na polotik na nevezentiou Pariz.
Komz a ra ar galleg 'vel eul leue pe eur wiz.

(Anna a grog da ouela).

Adarre ! Red e vo din bremañ facha tre.

Anna

Va zad ker, me ho ped, bezit ouzin true'.

Ar bourhiz

Paour-kêz plah ! Truez 'walh am-beus-me diouzit.
Ne glaskan 'med da vad, kred ahanon p'her laran dit.
Peseurt gounid a ri gand Yann o timezi ?
Plah daou-vil skoed leve gand peizant dibarti⁶ !!

Anna

C'hwi 'peus arhant evid daou.

Ar bourhiz

Petra ? Arhant 'vid daou !
Me 'wel n'anavezez ket talvoudegez an traou.
Peleh 'h-i gand Miller, peizant ken ez eo kouer⁷,
Pa oar 'med brezoneg. Pa 'h i e-barz eur gêr,
'Vo c'hoarzet war ho penn ! Pa 'h-efot 'n eur salon,
E vo ar peizant-se evel eur chaoudouron !

⁵ brezoneg : breizeg.

⁶ dibarti : heb gwenneg ebed.

⁷ kouer : paltok, fritter laou (hervez an oberour).

Anna

Feiz, me am-beus ivez c'hoant braz da hirvoudi.

Ar bourhiz

Hirvoud 'ta.

(Tevel a reont eur pennadig).

Sell, Anna, azezom eul lommig⁸,
Ma kontim euz an traou eur wech, ha rik-ha-rik.
Mar 'teus soñj mad a ze, n'eus ket pemzeg deiz c'hoaz,
'Teuas amañ eur paotr yaouank karget a hras
Hag a flouradennou. Dond a ree da weled
Hag-eñ e chome c'hoaz miniou plom da gaved,
Te 'oar zo bet gwechall labouret kalz war ze
Pa oa mengleuziou plom o ren 'barz ar hontre.
'Hanta ! An Aotrou-ze, a du Roazon deuet,
En-deus, el leoriou koz, eun deiz, dizoloet
E vane dre amañ mengleuziou plom-arhant.
Rre aour a oa ivez, zoken en Kenekant.
'Michañs en-doa klevet komz euz on tiegez.
Amañ eo deut war-eeun, se avad a ouzez.
Pa glevis pehini a oa e gevridi
Am-eus galvet da vamm, ha kalz 'plijas dezi.

Da biou ne blijfe ket eun aotrou ken lirzin ?
Neuze 'n-eus kendalhet goulenn en eur hoarzin
Keleier war an traou, ar parkou, o ano :
Me 'lavare dezañ, peogwir on deuz ar vro.
Me 'lar dit, Annaig, d'az mamm en-deus plijet
Muioh 'vid din-me c'hoaz... ya, ma vije gallet.
Prientet eul lein vad, ha pedet an aotrou.
Degemeret en-deus gand bep seurt bennoziou.
Tra ma padas al lein, ne ree 'med selled ouzit.
Me 'wele 'walh 'nije c'hoantaet komz ganit.
'N e zaoulagad 'lennen... Mez te, gand fri mouzet,
Ne zelles 'med a-gorn, ma oa mez da weled.
Ha feiz ! Goude lein on eet gantañ da vale,
Da ziskouez al lehiou. Gouestlet 'm-eus, ma Doue,
'Mije roet dezañ pemp-kant lur da gomañs...
Roet ha toud int ! Ba ! Red eo pursu⁹ ar chañs.
Ne ree nemed komz din deuz da hras, da gened.
Te 'oa koanta plahig en-doa biskoaz gwelet.
Koulskoude 'n-oa redet. Gwelet en-doa Bro-Hall.
Beajet en-devoa en kalz a vroiou all !
Gwelet en-doa Pariz !!! En tud euz ar seurt-se
Eo aotreet, me 'gred, kaoud kredenn ha fe'¹⁰

⁸ lommig : eur pennadig (hervez an oberour).

⁹ pursu : dedenna.

Anna

Ya, va zad ! Mez siwaz, me 'm-eus 'med enkrezo'
O weled e fiziit kement 'n eur reder-bro.
Aze ho-peus roet pemp-kant lur d'eun aotrou
Ha ne welfot biken marteze o roudou !

Ar bourhiz

Me 'lar dit, penn kaled, ez eo eun den a boell.
Kredenn am-beus ennañ. Eun den eo 'vel e fell.
Ha touet en-deus din e teuje war e giz
A-benn eun teir zizun, pe d'an hirra, eur miz.
Red e oa dezañ mond da gomz ouz renerien
"La Compagnie des Mines" ; da glask micherourien,
Ha goude, p'en-dije prientet mad an traou,
'Vije kroget raktal da gleuza ar parkou.

Anna

C'hwi 'ray 'vel e kerot. Mez me ne garan ket
Stumm nag êr an den-ze. Hennez 'zo laer kuzet.

Ar bourhiz

Eul laer ?... Red e vo din facha krenn diouzit.
Mad ! Bez soñj koulskoude eo ar gwaz roin dit !!!

Kevrenn III

(An heveleb re ; ar Vamm).

Ar vamm

(Gand eur vouez torret hag eun ton galleger).

Bonjour, mes chers amis. Krog oh d'ober eur gaoz ?
Me 'vefe kuriuz...

Ar bourhiz

Ni 'laro deoh penaoz.

Anna

Va mamm...

Ar bourhiz

Va gwreg, setu deuz petra e oa kont,
'Baoe eur pennad-amzer 'reom 'med mond ha dond.
Poent eo kaozeal frêz. Dimezi a zo red.
Anna a zo en oad da vond gand eur pried.

¹⁰ fe' : feiz.

Ar vamm

Dimezi, greet ha toud !... sell amañ eul lizer.
Digand “Monsieur” Mercier. Deut eo gand ar faktour¹¹.

(Rei a ra al lizer d'he fried ; hemañ a dap e lunedou hag a lenn. Dre ma ya, Anna a gemer he lien-godell da zeha he daelou).

Cher Monsieur,

Comme je vous le disais, je dois arriver prochainement chez vous pour mener à bonne fin l'entreprise minière dont j'ai la direction sur les terroirs de Plougar et communes limitrophes.

J'en ai parlé au Directeur de la Compagnie Générale, qui m'a donné carte blanche pour prendre toutes mesures. J'arriverai donc bientôt avec les premiers ouvriers.

Agréez, Monsieur, l'assurance de mes civilités distinguées.

Anastase Mercier.

P.S. : Présentez, je vous prie, mes respects à Madame votre épouse, et mon plus gracieux bonjour à Mlle Anna, dont mon cœur se réjouit quotidiennement d'avoir fait la connaissance.

Ar vamm

'Barz ar penn diweza, e weler difazi
Ema 'n aotrou Mercier o klask an dimezi...

Ar bourhiz

Gweled a rez, Annaig, va merh kêz, gweled a rez,
Petore parti kaer¹² a rafes gand hennez !...

Ar vamm

Eur parti kaer, 'vid gwir ! Trugarez da Zoue
D'hen beza dre vuzud degaset er hontre.

Ar vatez

(En eur hanter-zigeri an nor).

Madam' all' a sarvi !¹³

Ar vamm

(D'he gwaz, en eur vond kuit).

'Med galleg ne gomz ken,
Ar beure-mañ 'rois dezi ar gourhemenn.

¹¹ ar faktour : Bet skrivet “fakter” er skrid orin, evid ar rim.

¹² parti kaer : galleg. Tenna e vad deuz...

¹³ Madam' all' a sarvi ! : galleg iskiz.

Kevrenn IV

Yann Miller

(E-unan. Gwisket eo evel eul Leonad, gwiskamant ar Vretoned. Eur skourjez a zo gantañ en e zorn. Kana a ra en eur vond :)

Mar 'mije-me bet skiant ha spered da rima
Em-bije savet eur zon d'am dousig ar goanta ;
Mez allaz, 'm-eus 'med kalon, ne don ket gouizieg,
Ne ouian ket ar galleg, n'ouzon 'med brezoneg !
(Komz a ra).

Ba ! Perag 'n em skuiza da vond d'ober gwerziou ?
Re hlaharet ez on 'vid kaoud va rimellou¹⁴.

(Kana a ra kenta pennad "Kanaouenn an durzunell").

Kalz amzevr am-beus kollet,
O furchal er hoajou,
Evid klask an durzunell,
Kousket war ar brankou ;
Devet am-beus va amors
Ha tennet am-beus fall.
Achapet an durzunell,
Ha nijet er hoad all.

*(Trouz a glev 'dreg e gein. Trei a ra, hag e wel e zousig o tond goustadig,
war begou he zreid¹⁵. Chom a ra souezet, mez Anna a ra sin dezañ da devel).*

Anna

'Rez ket a drouz, Yann baour. Mar vezen gwelet gand va zad...
En eur glevet da zon on diredet d'ar prad.
Me 'anaveze da vouez.

Yann

Anna, va harante' !

(Koueza a ra d'an daoulin).

Anna

Sao 'lese ! – gand va zad 'm-eus bet 'vid ar beure
Eur gont lemm ha garo diwar da benn, Yann baour.
Te 'oar koulz ha me, ne gar nemed an aour.

Yann

¹⁴ rimellou : rimou.

¹⁵ war begou he zreid : galleg troet ger evid ger e brezoneg. "dousig".

'Zell ket ouz ar galon.

Anna

Mez fiz ennon bepred.

Da garoud da viken 'm-eus d'ar Werhez touet.

Yann

O Anna, me a zoñj ennout deiz ha noz.

Anna

War ar bed 'vim juntet, - pe 'barz ar baradoz.

(Trouz a glevont. Anna ha Yann a red e-kuit, pep hini dre e du. War-ze, eh erru an aotrou Teo).

Ar bourhiz

Feiz ! Deut e oan d'ober eun dro 'barz em farkou.

(Selloud a ra en e dro).

Red 'vo din lavared distanka ar gwaziou ;

An dour ne red ket ken.

(Selloud a ra pelloh).

Ezomm am-beus ivez

Da lavared troha ar brouskoajou kelvez.

(Mond a ra kuit en eur vutunad).

Eil arvest

(Gweled a reer war an teatr eur strollad micherourien gand paliou, kregier, morzoliou ha barrinier houarn. Eun aotrou yaouank gand eul lost-pik a gomz outo).

Kevrenn I

An aotrou Mercier ; Micherourien

'Hanta, va micherourien, erru om 'benn ar fin.

Bremaig me 'baeo deoh beb a chopinad gwin.

Mez klevit mad ar pezh a laran deoh bremañ.

Bet¹⁶ soñj om o c'hoari ar gomedi¹⁷ amañ.

¹⁶ Bet : bezet.

¹⁷ ar gomedi : ar gomedienn.

M'hen asur deoh, paeet e vefoh oll,
Mar gallan dond a-benn deuz ar penn euz va zaol.
It bremañ da zebri ho lein war va houst-me.
Warhoaz neuze, 'krogim da bigosa 'r mene'

Kevrenn II

Mercier

(E-unan).

Setu-me o c'hoari va hoari diweza !
Me 'gred e teuin a-benn da hounid ar plah-ma'.
He zad a zo ker diod !... E bemp kant lur, avad,
A ro din eun tañvez¹⁸ deuz an traou a hall kad¹⁹ !
Miniou plom hag arhant ! O ! brava sorhennou,
Am-beus kavet evid touella 'r sperejou !
Eur micherour bennag 'zo bet feurmet ganin
A zikouro 'hanon da guz²⁰ ar pez a rin.
Mez va zaol 'zo leh all... ar verh hag he leve !
Mez he leve dreist-oll eo a hoantaan-me.

(Kregi a ra da hoarzin, mez kleved a ra 'dreg ar gouel, hag e chom peoh).

Kevrenn III

Ar bourhiz ; Mercier

*(Erruoud a ra ar bourhiz. Mercier a ra dezañ eur bern arvezioù 'giz Pariz.
An aotrou Teo a zo ruz gand ar blijadur).*

Mercier

Boñjou deoh, aotrou ker. Penaoz ema ar bed ?
Spontuz 'oa braz ar mall 'oa ganin d'ho kweled !

Ar bourhiz

(Gand sellou livriz, a stard dezañ e zorn).

O ! va mignon karet ! Erru oh war ho kiz...
Pegen hir, pegen trist, am-beus kavet ar miz !
(Gervel a ra).

Va gwreg !... Va merh !... Hastit, hastit afo !
Deuit buan amañ ! 'Ma an aotrou distro !

¹⁸ eun tañvez : eun tañva.

¹⁹ kad : kaoud.

²⁰ da guz : da guzad.

(Trouz en tu all. An nor a-dreñv a zigor, hag an itron Teo a zered, hanter diskabell).

Mercier

(O vond 'trezeg dezi).

Boñjour, va itron ger. Laouen ouz ho kweled !

An itron

Ha me eta, aotrou ! Va joa 'zo braz-meurbed !

(Kregi a ra an itron gêz da leñva gand al levenez. Ar bourhiz a dorch e zaoulagad gand kein e zorn).

Mercier

Me ho ped, va zad ker, stankit krenn ho taelou.

Ar bourhiz

Gouela, va aotrou ker, 'ziskarg ar halonou.

(Gervel a ra :)

Anna ? Va merh ? Deus 'ta, peleh emhout chomet ?

(Antren a ra Anna gand eun êr droug-kontant. An divroad a lamm 'trezeg dezi, hag a bleg dirazi, ma stok e benn d'an douar).

Mercier

Bonjour, mademoiselle. List 'ahanon, m'ho ped,

D'ho saludi bremañ gand kalz a lealded.

Anna

(Gand eur vouez yen).

Me ho trugareka deuz ho kourhemenn.

Mercier

'Zo ken pur, dimezell, ha kan an evnigou.

Ar bourhiz

(O sevel e zaouarn war-zu an neñv).

Peger kaer gweled daou zen staget dre ar galon !...

Mez azezom, m'ho ped, ha cheñchom bremañ ton.

(Azeza a reont).

Hag ar miniou, aotrou ? Me 'zoñj ez oh deuet...

Mercier

Just a-walh. Ha warhoaz e vo ganin kroget.

Degaset 'm-eus ganin eur bern micherourien,

Ar gwella 'm-eus kavet 'tousez al labourerien !

... En pep korn dre amañ 'zo gwiskou plom-arhant,

Ha 'vid unan roim, ni a hounezo kant !

An Itron

O ! Doue benniget !

Mercier

Kement-se 'zo gwirion !
Mez a-wechou 'vo red kleuza en douar don !...

Ar bourhiz

Ingal eo pegen don ! Arhant ne vanko ket
Keid e vo em godell eur roudenn euz eur skoed.

Mercier

(Goustadig d'ar bourhiz).
Ezomm am-beus da gomz ouzoh hoh-unan.

Ar bourhiz

(D'e wreg ha d'e verh).
M'ho ped ho-tiou, lezit 'hanom eun tamm bihan.

Kevrenn IV Mercier ; Ar bourhiz

Mercier

Al labour a grogom 'zo sur da zond da vad.
Kompagnunez Pariz 'deus roet din he grad.
'N em glevet on ganti da rei deoh an drederenn
Deuz ar hounidigez a vo greet war ar bern.
Mez... c'hwi ne ouezit ket. Eun dra 'ra aon din :
Droug-lavariou ar vro a vezo 'eneb din.
(Chom a ra da zoñjal).
Deuz eun tu all, erru eo poent din lavared
A beseurt karantez 'vid ho merh on devet.
Me he har ! War he lerh ne ran 'med hirvoudi.
'Pad ar miz diweza ne zoñjen 'med enni.
Me houlenn diganeoh rei din eta ho merh,
Ha dirag tud ar vro, va brud a vezo gwerh.
Ouspenn, me 'm-eus madou e-tal kichenn Roazon.
Va zad 'zo alvokad, va mamm 'zo eun itron,
Va gouenn a zo brudet, enoret 'barz va bro,
Ha pa ho-pezo c'hoant me ray deoh provenno'²¹.

Ar bourhiz

Pebez taol mad ! Eno 'oa ivez va mennad,
Ha va gwreg a zo prest da rei deoh he grad vad.

²¹ provenno' : prouennou.

Deoh e vezo va merh, aotrou, bezit asur,
Rag me 'wel ez oh-c'hwi eun den gouizieg ha fur.

Mercier

Ya, aotrou ker-meurbed. Me a bromet deoh
Ober eurvad ho merh, he haroud evelдох.

Ar bourhiz

Evid komañs, dalit eur billed a gant lur.

Mercier

(En e berz e-unan).

Ar hoz Breton koz-mañ n'eo ket eun den gwall fur !
(O trei 'trezeg an aotrou Teol, gand kalz a chiboudou).
O ! nann ! Se 'zo kalz re !! Biken ne gemerin !...
Ar galon a glaskan. N'eo ket arhant 'fell din !

Ar bourhiz

Kemer, kemer eta, ha fin 'vo dre eno.
(An divroad a lak ar billed en e hodell).
Soñjom bremañ pegoulz 'vo greet an embanno'.

Mercier

P'ho-peus c'hoant, aotrou.

Ar bourhiz

A-benn eiz deiz neuze,

E vo greet an eured dirag mêt ha kure.
(O sevel hag o kemer breh Mercier).
Deut bremañ da zebri eun tammig lein bennag.
Pa vez êzet ar horv, ar spered 'vez distag.
(Mond a reont kuit dre eun tu).

Kevrenn V

(En eun ostaleri. Gweloud a reer eur vandennad micherourien o tond da zebri o lein. Eun daol a zeu ganto ha jistr ha gwin war an daol. Yann Miller a zo en o mesk. Eur plah²²).

Per Cocagne (Micherour)

Evom jistr a-gorvad !... Pa n'eo ket war or houst,
Evom mad, ha goude 'vim divahagn ha moust.

Yann Miller

²² Eur plah : eur vatez.

Evom jistr ar Breton ! Hennez eo ar gwella !
Evit, ha me 'baeo eun dro goude houma'.

Per

Mad eo se ! Mar 'mizem²³ mignoned 'barz ar vro,
Ken digor hag eh out, 'mizem c'hoariet tro²⁴ !...

Yann Miller

(a gan)

Jistr ar Breton 'zo jistr bevuz.
Hennez a lak an dud nerzuz !
Jistr ar Breton eo ar gwella
'Hallfet da gavoud er bed-ma'.

Per ha daou all

(a ziston)

Jistr ar Breton eo ar gwella
'Hallfet da gavoud er bed-ma'.

*(Derhel a reont da eva. Gweled a reer Yann ha Per o kaozeal goustadig,
gand siniou sekret. Er heid-se, eur micherour a gouez mezo dindan an daol,
ar re all a chom kousket. N'eus ken nemed Per ha Yann dihun, mez Per a zo
mezo-dall. Eur paper a gouez. Per her sav).*

Yann

'Hanta, Per, va mignon, petra 'zo goude-ze ?

Per

Tra-walh 'm-eus lavaret... Keuz braz am-beus da ze...
(Sorohal a ra hag e chom kousket).
(Yann a zav, hag a ya er-mêz euz ar zal en eur grozal).
Mad eo ! goud oun²⁵ an taol ! Pebez den fall ha laer...
N'eus ket amzer da goll, pe 'h eo greet on afer.
(Redeg a ra kuit).

Trived arvest

*(Anna a zo o wriad en he jardrin. A-greiz-oll, eur gwaz a zaill ar hleuz, hag
a zeu 'trezeg dezi. Yann Miller, he c'hoantuz²⁶, eo).*

Kevrenn I

Yann Miller, Anna

²³ 'mizem : on-defe.

²⁴ c'hoari tro : c'hoari las.

²⁵ goud oun : gouzoud a ouzon.

²⁶ he c'hoantuz : heh amourouz.

Yann Miller

Iskuzit ahanon, Anna, va dousig koant.
Komz raktal ouzoh am-beus eur braz a hoant.
Ma 'ya da gonta deoh en komzou frêz ha berr
Ar pezh am-beus klevet war eul louz a afer.
Degouezet e oa din beza ti an ostiz
Gand micherourien deut en or bro a Bariz.
Neuze, en eur eva ganto eur werennad
Am-beus desket eun dra hag ho souezo mad.
Diwar nerz ar jistr dous ar rener anezo
En-deus lavaret din perag e oant er vro...
Beza 'z eus eun aotrou hag o fae da zoned
D'ober van da gleuza. Evid-se int klasket.
Er heid-se an aotrou, dre chiboudou d'ho tad
'Zo en soñj da hounid tamm-ha-tamm e hrad vad
'Vid ma presto dezañ eur zomm vraz a arhant.
Da zimezi ganeoh en-deus ivez ar c'hoant.
Sellit, Annaig paour, petore stal spontuz
'Oa nezet dirazoh !...

Kevrenn II

Yann Miller, Anna, Ar bourhiz (*a zo erru goustadig*)

Ar bourhiz

A ! Daou zen gwalleüruz !

Me ho kar asamblez !!

(*Diskouez a ra da Yann e zorn serret*).

Te, kerz ahann, koz kouër !

(*Yann a ya 'trezeg ar bourhiz gand droug braz ennañ*).

Anna

(*Oh en em lakaad etrezo*).

O va zad, selaouit, me ho ped, an afer !...

Selaouit peseurt tra, evid or has da goll

A zo nevez steuziet.

Ar bourhiz

Petra 'zo, merh diroll ?

Anna

O ! va zad ! Selaouit, me ho ped, an istor,

Ha n'en em lakit ket ken buan e fulor.

An aotrou a Roazon ah eo ar gwasa den

A hallfer da gavoud war ar bed penn-da-benn.

Ar bourhiz

Petra ?

Anna

Selaouit 'ta petra en-deus steuziet
'Vid laerez ahanoh, ha koll ho merh karet,
Yann Miller 'n-eus klevet eun ar vicherourien
Etre daou vannah jistr o komz diwar e benn.
Hennez n'ema er vro 'med evid ho suna !
An oll mengleuziou plom... kredit, nend int netra !
Eñ 'bae micherourien d'ober ar gomedi
'Vid skrapad hoh arhant, hag evid dimezi...

Ar bourhiz

Gaouiaded ! Daou haillon...

(O trei war-zu Yann).

Te eo e-teus kavet

Eur seurt torfetourez 'barz eun den ker brudet ?...
Leun out a warizi !! N'emaout evid pad
Pa welez n'e-po ket va merhig da lipad !

Yann Miller

Dirag ho keriou fall, me a dlefe tevel,
Hag ho lezel didruez marteze da vevel.
Mez me a gar ho merh, hag ablamour da ze
Me 'fell din dizolo eur vraz a fallente'.
(Tenna a ra eur paper er-mêz euz e hodell).
Sed eul lizer amañ, kouezet war al leurzi
Digand eur micherour, 'barz an ostaleri.

Ar bourhiz

(Ar bourhiz a dap e lunedou hag a lenn).

"Va mignon ker,

Setu-ni erru e Plougar. Or mestr, an aotrou Mercier, en-deus tapet
brao ar hoz bourhiz lorhuz-se, an Teo koz. Roet en-deus dezañ da
gredi e oa mengleuziou plom er vro, ha ni a zo paeet gantañ d'hen
sikour da gas e daol da vad. Pa vezo dimezet gand merh an hini
koz...

Ar bourhiz

(Komz a ra).

Me eo an hini koz ?

(Lenn a ra adarre).

« Ha skrapet eun tamm arhant digantañ, e teuim adarre war or hiz.
Kenavo eta.

Da vignon : Per Cocagne. »

(Komz a ra).

O ! Doue benniget !!
Ha posubl e vije ?.. O ! trubard milliget !
(*Chom a ra mantret. Adselled a ra ouz ar paper, hag hen trei a ra a bep tu*).
Ya ! Dioutañ 'vez komzet ! E ano 'zo aze !
O klask ober eur zod emaint 'ta ganin-me ?
(*Er heid-se Anna ha Yann Miller a zo eet e-kuit*).

Kevrenn III

(*A-greiz m'ema kollet en e zoñjezonou, an Aotrou Mêr a zo erru war an
teatr, eur houriz ruz-gwenn-glaz gantañ*).

Ar bourhiz, ar Mêr

Ar mêr

'Hanta ! va amezeg ! Petra 'rit-hu aze ?
Gortozit, ma kontin deoh eun dra nevé'
Hag ho souezo krenn. Ar beure-mañ, abred,
Am-beus bet eul lizer demeuz perz ar prefed
Da laroud din ober areti dioustu-kaer
Eul laer deut en or bro... Ya, va homper, eul laer.
Hennez en-deus bet greet meur a daol e Pariz,
Laerez ha friponad... 'Oad ket evid hen tiz²⁷.
Hogen dizoloet ez eo bet e roudou.
En or bro ez eo deut d'ober laeroñsiou.
E ano 'zo Dumont, Mercier eo lesanvet.
'Hanta, komper, n'ouzoh ket petra am-beus greet ?
Gervel an archerien...

Ar bourhiz

(*O poka d'ar mêr*).

O ! va homper karet, setu-te va zalver !

Ar mêr

Hañ ?

Ar bourhiz

Komper benniget, sell amañ eul lizer.

Ar mêr

(*a lenn, hag a lavar goude* :)

Bezom laouen on-daou. Ma ne ve ket krouget
E hello kaloneg eur Bater lavared !!
Mez petra 'zo aze ?

²⁷ tiz : tizoud.

Kevrenn IV

An heveleb re. daou archer **Mercier** (*etrezo, chadennet*)

An archerien

Demad deoh, tudjantil.
Tizet eo ol laer. N'eo ket bet gwall abil.
(*Pellaad a reont en eur lavared :*)
Setu amañ eun taol ha ne esperem ket !
Eun tamm moneiz or-bo 'vid eñ beza paket.

Kevrenn V

Ar mêt, Ar bourhiz, Micherourien, Peizanted

(*A-boan ma'z eo kizet an archerien ma tremen ar vicherourien hall en eur redeg, war o lerh eur vandenn Vretoned, bizier ganto*).

Ar Vretoned

Haro war al laeron ! Baz d'al lakepoded.
Ar re-mañ o-devo soñj deuz Bro ar Vretoned !...
(*Pellaad a reont toud*).

Kevrenn VI

Ar bourhiz, Ar mêt.

*Antren a ra : Anna ha Yann Miller, a-unan gand ar vourhizez
hag o matez Katell.*

Ar bourhiz

O ! ma Doue, bezit da viken benniget
'Vid beza on tennet deuz lasou an diaouled !
Tizet on bet, 'vid gwir, o tispriz va broiz,
Mez diarhent²⁸ me ray muioh a onestiz.
(*Lakaad a ra dorn Yann e hini e verh Anna*).
Te, Yann, 'daleg bremañ, a vezo mab din-me.
Krog e-barz dorn va merh, rag bremañ eo dit-te.

Ar mêt

²⁸ diarhent : ger iskiz... "a-benn bremañ", hervez an oberour.

Setu eun dimezi a ra va levez.
Ne vo ket a drubuill leh ma'z eus karantez.

Ar vourhizez

Bevit eüruz ho-taou... Me 'ro deoh va bennoz.
Gras d'eoh d'en em weled c'hoaz e-barz ar baradoz.
(En eur en em drei 'trezeg he matez Katell hag en eur lakaad he biz dindan he fri).
Ha te, Katell gollet²⁹, taol pled mad e komzfes
Tamm galleg ebed mui, pe 'vi kaset er-mêz !!

Yann Miller

'Vid beza pried mad n'eo ket red goud galleg.
Enor eta da Vreiz ha d'ar yez vrezoneg³⁰ !
Ra chomo pell ouzom oll lakizien Bariz :
Frañs a zo d'ar Frañsizien, ha Breiz 'zo d'ar Vreiziz !

Diwez

Kanaouenn Laou Druilleg

N'am-eus na ti, na kerent,
N'am-eus mignon ebed !
Re all 'deus pezh a garent,
Me 'ya da glask va boued !
Va godell a zo goullou,
Daou wenneg 'm-eus hepken.
Mez an hent sklêr en oablo'
'Zo din, war va hredenn.

Ne glaskan ket ar madou
Nag ar hloar nag ar vrud !
Me 'zoñj, an oll enoriou
A vez aliez pud !
Dihoant on ha dizoursi
Mez me 'm-eus koulskoude
Hentchou Europ hag Azi
Da bourmen va danve'.

Daou wenneg 'zo em godell,
'M-eus bet en aluzenn.
Ne vanko ket din skoazell,

²⁹ Katell gollet : iskiz. Hervez an oberour "lamponez".

³⁰ d'ar yez vrezoneg : brezoneg fall ; "ar brezoneg" pe "yez Vreiz"

Me 'oar tapoud va den !
Daou wenneg ! Setu va stal !
Komañs't int d'am devi.
Gante me 'ya da gestal
Eur bannah "eau de vie".

Goude, mar gallan flemma
Eur wrahig koz bennag,
Me 'breno eun tamm bara
Rag va hov a zo gwag !
Goude... mar gallan krignad
Daou wenneg all arre³¹...
Me 'oar eun draig 'zo mad :
Eun tamm kig da greisteiz.

Evidon war an douar
N'eus ket a nehamant.
N'am-eus ket ezomm a hloar,
A aour nag a arhant !
Mez eun deiz Laouig Truilleg,
E-barz ar baradoz,
'Kichenn an oll-Halloudeg,
'Vo laket da repoz.

Eun nozvez sul yen skornet
Da zeg eur, rik-ha-rik,
'N eur foz ema bet kavet
Laou Druilleg maro-mik.
'N e hodell eur horn-butun
Hag eur pez daou wenneg...
Eno 'oa e oll fortun,
D'ar paour-kêz Laou Druilleg.

F.J.³²

³¹ arre ; adarre.

³² F.J. ; Fañch Jaffrennou.